

Niv. 54

15 gouere — 15 eost 1974

« POBL VREIZH »

*

B. P. 304
29273 BREST CEDEX

KOUMANANTOU

Boutin : 6 L

Skoazell : adaleg 15 L

K.R.P. 2746-79 ROAZON

POBL VREIZH

0,50

AR C'HWEZH (1)

C'hwi 'lavaro, tudaù, re domm eo an amzer evelkent evit komz eus traoù ken luziet, ken start da gompren ! Komz eus c'hwezhadur ar moneiz, e-kreiz miz gouere, biskoazh kemend-all !

Moarvat emañ ar wirionez ganeoc'h pa 'z eo graet ar vakafisoù evit diskuizhañ. Koulskoude avat... E-pad ar vakafisoù an hini eo e vez an aezetañ d'ar pennoù bras aozaf o mestaolioù pa n'emañ ket al labourerion war evezh ken. Setu perak eo ret teurel plê, zoken e-pad ar vakafisoù, rak, heol pe get, e talc'ho ar moneiz da c'hwezhañ.

Luziet spontus eo ar gudenn. Se zo kaoz emañ hon pennoù bras en o bleud evit luziañ anezhi muioc'h c'hoazh ! Un deiz e vez skoet ar bec'h war gein hemañ, ar sizhun all war gein henezh.

Da gentañ e oa lavaret e teue c'hwezhadur ar moneiz eus kresk priz ar petrol, da c'houde oa bet tamallet an uzinioù, dre ma paeent re o micherourion ; bremañ avat e vez taolet ar bec'h war an tiegezhioù. Rebechet e vez d'an dud foetañ re hag erbediñ re nebeut. Koulskoude, n'eo ket brav d'an den erbediñ e wenneion en deizioù-mañ, rak n'en devo nemet 8 % a vad diwarne pa gollfont 18 % eus o zalvoudegezh e-keit-se.

Petra eo ar monc'hwezh a-benn ar fin ? Un dell (*Tailh, truj, taos*) eo en gwirionez, dre ma vez adtapet e-giz-se digant an dud ul lod brasoc'h-brasañ eus ar pezh o devez gonezet.

Petra ra Valéry Giscard d'Estaing e-keit-se ? Takonañ, traken ! Lakaet en deus un dell a 18 % war gonidoù ar c'hevredigezhioù bras ; n'a ket da bell pa ouzer penaos an drederenn eus ar c'hevredigezhioù-se ne c'honzont mann ebet (da-larse !). Ne c'hall ket Giscard mont a-enep interestoù ar re o deus lakaet anezhañ lec'h m'emañ.

Marteze e c'hellfe ober evel m'o deus graet an Alamaned, nemet an dro-se e vije gwelet fall, ha koll e vrud a vije dañjerus evit un den a zo bet lakaet e-barzh gant 0,8 % eus ar mouezhioù.

Neuze e ra evel m'en deus graet a-viskoazh hag al lezober a vez o ren. Gwazh a-se evit ar Vretoned ! Rak pa c'hwezh ar moneiz e vez tapet ar re baourañ da gentañ, an dud paourañ evel ar broioù paourañ.

Hag ar wech-mañ adarre, e vo tapet div wech al labourerion vreton : ur wech pa'z int labourerion, ur wech all pa'z int Bretoned.

UDB

(1) Ar c'hwezh, c'hwezhadur ar moneiz, monc'hwezh : l'inflation.

AN ARME ER-MAEZ!

(gwelout p. 3)

Tro-Vreizh Youenn Gwernig hag An Triskell



20-25 a viz Gouere 1974

Pennad kaoz gant YOUENN GWERNIG paj. 4



Ra vo meulet dollarou ar Cha !

Hevez ar prif Pontatowski ministr a-z-barzh ha paotr ar polis, ret e vije bet, da bep kelouenn, reñf met gant ul loa-bod d'ar beg lipous a zo deuet d'ober ur wladenn d'e vignon Jiskar (ur paotr hag a zo re ver e betrol gantañ). Ar Challaoued, hevezhañ, a zo bet seven-kenan, e-keñver o c'houvidi. Charis hon eus, ni, Brezhiñ, neuze, ha ni tud gouez, evel ma gouez, ha n'eo ket difennet c'hezh soubañ o flunen e-barzh ar vitrol a-raok krabanata un euzhas a zen, impalaer bro-Iran, ar Cha evel ma vez graet dioutañ. Kaer en deus Pontatowski ober e gzhz glet, Pobl Vreizh e embanno nompas ar pezh a garo, met ar pezh a zo gwir.

EVIT PIV EO BET GRAET AR FILM ?

Da'm zro, ne gomprenan ket perak eo souzhet B. an Nail eus va barnadenn a-zivout *Ti pri*. Daoust ha n'en deus ket lennet *Al Liamm ha Sav Brezh ?* N'on ket all ganto bepred, met warno ez eus traoù a zo heñvel ouzha va ra, hep un emglev etrezomp, e-keñver ar film. N'am bo nemet ur goullenn da ober, ur goullenn a lakay diouzhus tud 'zo d'an tu meritet ganto : N'evit piv eo bet graet ar film ? Ne rebecban netra da skudennou kaer Fulup Cassard, ne rebecban netra da Alan Stivel en deus rentet servij d'an aozorion. Met gortoz a reomp ur film a brezhoneg evit ur wech, ur film o tieplegiñ buhez diess al labourerion-douar hag o tizelañ ar re girek d'o stad reuzeudik. Disouezhet-krenn en bet o klevouet esadalegou (1) diridi ha drest natur. Evit ar bobl e oa ? Evit ar bobl o deus labourer ar re o deus savet ar c'homzou ? Evit reñf dezhi, dre he yezh, un emskiant eus he sujidegiz (*assujettissement*) ? N'eo ket gwir. Ne fell ket din krediñ ez eo paour brezhoneg ar bobl. Evel ma lavar ur skrivagner estren : «Ar pezh a vez komprenet, a vez displeget sklaer... ha gant gerioù pemdezlek. Eus an Ensav kozh eo an hini a

a va atav war greskif o niver, ha prenet, darn anezho, digant bro-C'hall. Strinkañ a ra ar petrol a-lezh (hag amañ e briz o strinkañ uheloec'h c'hoazh !). Ur bernad gaz isdourel a zo bet kavet nevez zo... Mont a ra mat an traoù neuze ? O, ya ! Evit ar re binvidik a zo roet dezho moanen da vezañ pinvidikaet grim-ha-grim un tamm ma muioch. Evit ar re all... paourat int, hevez tud zo, drougprezegeion daonet ! Arabat lakaat war e dieod tud lous seurt-se, tud didalvez, gochisted, ha ma oarime. Evit herzel ar re-se da gontañ gevier, emichañs, 136 paotr yaouank a zo bet barnet d'ar marv ha fuzuilhet adal 1972. Met pet ouzhpenn a zo bet lazhet dre guez, goude bezañ bouretet da vat ? Siwazh, en hon bed-ni bremañ, n'eo ket diaes d'un den bezañ pardonet e dorfed, gant ma vo leun a zollou- o s'ac'h ha beuzet gant ur barr-petrol benniget !

Diskrog-labour en O.R.T.F.

Aliez a wech ez eus gweliet ha klevet, e riz even, koantenn ar skramm bihan, ruz he muzeleioù betek he divskouarn, o tiepleg deom ne vije skingadenn ebet abalamour da harz-labour eur rummad bennag a labourerion euz an «ofisa». Beh en O.R.T.F. eta. Perag ? abalamour d'ar pae ha da gaez a droal all c'hoaz. E-barz ar gouarnamant ez eus tud c'hoant dezhe krovi ur chadenn brevez pe zioù ha tud an O.R.T.F. a fell dezhe e chomfe an «ofisa» evel m'ema, pebi gwir miret striz evid sking, eur monopol evel ma lavarer. Aze ema an dall, sansed, Evidom-ni, Bretoned, n'ema ket diaes ar gudenn. An O.R.T.F. evel m'ema ne ro nemed bruzou d'ar Vretoned evid piz a zell ouzha o yezh hag o sevenadrez. A-hend-all evid paz a sell o ekonomiezh eus eur mailh evid liva gevier a

ra traoù hep derc'hel kont eus ezhommoù ar bobl, da'm soñj. Bez' ez eus strolladoù tost ouzha an U.D.B., a lavar B. an Nail, a-hend-all. N'eus nemet un dra evito : dont asamblez gant ar re a war-dro «Pobl Vreizh», Diskouez a raint

hed an deiz, ha rei da gredi d'an dud e vez noz da greisteiz. Ha gwelast e vefe an traoù no ma vefet krouet ur chadenn brevez ? Ne chadenn ket tamm ebet. Bez' ez eus tar chadenn brevez dja er radio : Europe 1, Luxembourg, Monte-Carlo (ar re-mañ, hanter-opuz-hanter didan, galloud ha gouarnamant ha hini ar gaptalisted vras) ha ne skignont ket etre o zeir (e divaez kan-aoennou Stivel) eur frazenn vrezoneg heb deg vloaz. Pell ema ar gudenn evidom ni neuze ? Evidom ni eo rei ledanad-plas ar brezoneg ha divaez breiz ar radio hag en tele ; pe z vefe gwelloc'h c'hoaz vefe krovi eur chadenn ispisal evid broù bihan ar c'hweh-kogn. Kement-mañ n'eo ket hurvreal, e Breiz-Veur ema an traoù evel-se. Med amañ evel just, ez eur eur wech muioch, manet warfe.

Oad-gour da 18 bloaz

Nevez votet eo bet al lezenn-mañ gant an deputet hag ar senedourion. Setu roet ar gwir d'an dud yaouank da zimzi heb aotre o zud, da groui eur stal-labour pe eur stal-gerverez, ha drest-oil da voti, kement-mañ adaleg 18 bloaz. Eur dra vad eo sur maid rag anavez a ra an oil eo barrekoh ar yaouank bremañ aged eun toullad bloavezioù zo, lemmet ma'z eo bet spered an darn vras anezhe er skolioù, pe z ne oa ket gwir gwech-all. Piz a zo gwir ivez, evid ar Vretoned ket o flanedenn (eur blanedenn krouet penn da benn gant paotred vras ar gouarnamant) evid o hendad. C'hoant o deus da vev ha da labourad en o bro hendig ha setu e heller kaoud fiziads enno evid an amzer da zond. Emicharfa vo talet gant eur miz ipa vo roet tro dezhe d'hen ober ar Breizad a zo krieg da stad truzus ar bro, ar Breizad a lamm e vara digant ar bobl hag a werz ar vro da rofited maid neuze.

spilann an tu o deus choaet. Aldrig a Naoned. (1) diouz S.A.D.E.D., ur strollad en deus klasket sevel gerioù nevez diak pep ger uhela e galeg.

GOUERE 1974

TRO—VREIZH

YOUENN GWERNIG


HAG
AN
TRISKELL

ABADENNOU KAN HA FESTOU-NOZ.

Hag a-nevez er vro ?

KERLOUAN : AN ARME ER-MAEZ

An Naoned a vo kelt e miz eost !



En Naoned e vo graet ar *C'hendalc'h keltiek* er bloaz-mañ : eus an 13 d'an 18 a viz eost, da lavarout eo eus ar meurzh da noz betek diwezhad e noz ar sul 18. Un ensavadur kozh eo ar *C'hendalc'h keltiek*. Abaoe 1946, e ra bodadegoù, bep bloaz, en ur vro gelaiek d'is-hirvel. An dro-mañ e vo graet pep tra e k'ar Naoned e Fakulte al Lizehoù.

An abadennoù-noz a vo e porzh Kastell an 44000 Nantes. Duged, Majet e vo an dud e ti-debriñ ar studierion ha lojet e vint en Ostaleri ar studierion. Tu a vo ivez da gampañ. Ar yezhoù implijet er *C'hendalc'h* a vo ar yezhoù keltiek, ar galleg hag ar saoneg. Evit kaout folennou-enskrivañ, skrivañ d'ar sekretourva :

Kendalc'h keltiek
Château des Ducs de Bretagne
44000 Nantes.

brezhoneg hag ar Vrezhoneg. Hogen n'int ket priented (*prepaet*) a-walc'h, evid c'hoazh, evit mont diak ar polis pe al lezvern.

Ur staj brezhoneg e Skol-Veur Brest

Ur staj brezhoneg a zo bet dalc'het e Brest, adalek an 2 betek an 10 a viz gouere, e Fakulte al Lizehoù. Un doare-kelenn odioù-suel a zo bet implijet ha tu zo bet d'ober poelladennoù o kombodoù labo ar yezhoù bev. E fin miz meurzh hag e miz ebri, daou zevad-studi a oa bet ivez e Brest evit ar gelennerion hag ar brezhoneg.

Bep daou viz lennet

AL LIAMM (savet e 1945)

ar gelouenn nemet o reiñ, c'hwec'h gwech ar bloaz, barzhonegoù, kontadennoù, pennoù da bep seurt ha keleier. 80 pajenn e pep nivernenn.

Renn : Ronan Huon.
Koumanant : 30 liz. Studierion : 25 liz.
Mme S. Chereil, 109, bd de Verdun Rennes.
C.C.P. 2184-34 Rennes.

SKOAZELLIT Pobl Vreizh

Skazellit Pobl Vreizh hag a zifenn, en hor yezh, Breizh al labourerion, an ar gas ho profoù da «Pobl Vreizh» K.R.P. 2746-79 Roazhon.

Ar prosez-mañ a zo bet trefc'h evit ar

BREIZH N'EMAN KET DA WERZHAÑ

